

D'an 18 a viz Mae

- War-dro 303, en Aleksandria, merzherenti sant Dioskor. Hag-eñ mab ul lenner eus Cynopolis e voe harzet dre ma nac'he kinnig aberzhioù d'an idoloù. Goude bezañ boureviet kriz e voe dibennet.
- E 526, e Ravenna, merzherenti sant Yann Iañ, pab. Kaset da gKêrgustentin e-kichen an impalaer Justinianus gant ar roue ariat Teodorig e voe degemeret gant lidoù meur hag e lidas gouel Pask en iliz Santez-Sophia. Ur wezh distro e taolas Teodorig an diskredi warnañ hag e garc'haras e Ravenna lec'h ma varvas diwar ar naon hag ar sec'hed.
- E 1161, en Uppsala, merzherenti sant Erig, roue, Patrom Sveden. Gouarn a reas e vro gant furnez. Gwareziñ a reas gwirioù ar maouezed. Kas a reas sant Herri da avielañ Finland. Taget gant Daniz e voe lazhet ganto p'edo oc'h heuliañ an Oferenn Santel.
- En Iwerzhon, er VII^{vet} kd, sant Karadeg (Iw. Carthach), lesanvet ar Yaouank, manac'h e Bangor ha da c'houde abad Lios Mór.
- En Iwerzhon, santez Anna, maouez santel.- E Bro-Skos, e 801, sant Breasal, manac'h en enez Iona.
- En XI^{vet} kantved, sant Herve, manac'h, diskibl sant Roperzh Ervrezhel, penitiour e Chalonnas e Bro-C'hall.

D'an 19 a viz Mae

- War-dro 67, e Roma, da vare heskinadeg Neron, merzherenti sant Pudens, senedour, tad santez Prased ha santez Pudensiana, sant Novatus ha sant Timozeos. Gounezet e voe d'ar feiz kristen war-un-dro gant e wreg Claudia, ur Vreizhadez anezhi ha marteze adverc'h ar roue breizhek Karatakos (Karadeg). Diwar-se ha dre ma tarempered Bretoned e voe anvet o falez Palatium Britannicum. Eno e rojont bod da sant Pêr ha diwezhatoc'h da sant Paol ha neuze e voe graet ivez Hospitium Apostolorum eus o zi a voe evit gwir iliz kentañ Roma.
- War-dro 88, merzherenti santez Pudensiana, gwerc'hez, merc'h ar senator sant Pudens ha Claudia ma komz sant Paol diwar o fenn en e lizher da dTimozeos. Badezet a-gevret gant e c'hoar Prased gant sant Pêr e-unan, e voe merzheriet Pudensiana d'he c'hwezek vloaz, war-dro 88, ha sebeliet e katakomboù Santez-Prisilha lec'h ma oa beziet he zud endeo. Ur brientiliz a zo dindan he anv e Roma.
- E 230, e Roma, merzherenti sant Urban Iañ, pab, a voe taolet dre ur prenestr da-geñver ur reveulzi savet a-enep ar gristenion. Dilennet e voe e 222, goude merzherenti sant Kallist, hag e renas Iliz Roma gant fealded.
- E 804, ar gwenvidig Alcuin, abad. Genidik eus Evrog (York) e Bro-Saoz e reas eno studioù a-zoare er skol eskobel lec'h ma voe kelenner. O tistreiñ eus Roma ma oa bet kaset da gerc'hat pallium e eskob e kejas gant Karl-Veur e Parma. Hemañ a fizias ennañ diwezhatoc'h savidigezh skol ar palez. War un dro e voe abad Sant-Jos ha warlerc'h abad Sant-Varzhin Teurn.
- E 988, distro da Zoue ene sant Dunstan, abad hag arc'heskob Caergent. Ganet en Avallon e voe abad eno ha kelenner sant Neod. War-lerc'h bezañ eskob Caerwrangon e 957 ez eas da London e 959 ha da Gaerwent daou vloaz goude. Adsevel a reas ar vuhez vanac'h oc'h herouezañ un hevelep reolenn evit ar venec'h hag ar manac'hez. Hag eñ doueonour e oa ivez orfebour, livour, teuzour hag adeiladour.
- E 1296, sant Selestin V, pab. Penitiour e oa en Abbruzzi hag erruet da bevar ugent vloaz pa voe diuzet da bab e 1294, brudet ma oa evit e vuhez a binijenn hag e vurzhudoù. Goude un nebeud mizioù nemetken e tilezas e garg evit echuiñ e vuhez en digenvez, e kastell Fumone e-kichen Alatri el Latium, pell diouzh ar bed.
- E Breizh, e 1303, ganedigezh en neñvoù sant Erwan Haelouri, beleg, barnour, Patrom ar gloer hag an dud a lezenn, eil paeron Breizh. Ganet eo e 1253 maner Kêrvarzhin e Minic'hi-Landreger. Goude studioù uhel e Pariz hag en Orleañs e voe anvet ofisial e Roazhon, hag e Landreger da c'houde. Person e voe ivez e Tredraez hag e Louaneg. Beleg santel, alvokad reizh, difennour ar beorion, e voe ur skouer evit an holl ha brud ar burzhudoù graet gantañ ha c'hoarvezet goude e

dremenvar dre e hanterouriezh e lakaas da vezañ anavezet buan e Breizh hag en Europa a-bezh goude ma voe santelezh e 1347.

D'an 20 a viz Mae

- Er Iañ kantved, santez Lidia, kenwerzhourez vouk e Philippia Makedonia, gonezet e voe d'ar C'Hrist gant sant Paol a gavas bod en he zi war un dro gant sant Lukaz (kv. Ob. 16,11).
- E 624, distro da Zoue sant Aostregisil (pe Aostril), eskob Bourjez, mignon sant Amand. Goude e yaouankiz e lez rouaned Burgondia ez eas da veleg. Deuet da vezañ eskob Bourjez, skedus e santelezh, e roas degemer da sant Amand a zeuas diwezhatoc'h da vezañ eskob Maastricht. Evitañ e savas ul logell e-kichen an iliz-veur hag Amand a chomas eno pemzek bloaz o ren ar vuhez digenvez.
- E 793, e Kerdiz, e Bro-Gembre, sant Ethelbert, roue Anglia ar Reter. Kefrizet gant santez Alfreda pa voe drouklazhet.
- E 1444, en Aquila en Abruzzo, sant Bernardin a Sienna, beleg frañsezat. Embann a reas an Aviel dre e brezegezh hag e skouer, dre Italia o vrudañ an deoliezh da Anv Santel Jezuz.
- E Breizh, en Xvet kantved, sant Tirizhian (Gg. Téréthian, Thérésien), abad Lokmazv war aodoù Leon a-raok 1025.
- E Breizh, e 1667, ar bac'hiadez c'hoar Anjelika Garnier, d'he zregont bloaz, leanez eus urzh ar Weladenn e Kouent Maria-lid Naoned, kevrinourez.

D'an 21 a viz Mae

- En ilizoù ar Reter: sant Kustentin, marvet e 337, ha santez Helena, e vamm, a vez lidet hi d'an 18 a viz Eost er C'Hornôg. Hag eñ mab Constantius Chlor, unan eus ar pevar C'haezar, e voe ganet e Naissus (hiziv Nich e Serbia), war-dro 280, ha desavet e lez an impalaer Diocletianus. Goude marv e dad, e 309, e voe bonnet impalaer Gallia. Levezonet gant e vamm e warezas ar gristenion. Sevel a reas ul lu hag e kerzhas davet Roma lec'h ma rene Maxentius. Trec'hiñ a reas warnañ e Pont-Milvius e 312 goude bezañ lakaet e vilourion dindan warez arouez ar C'Hrist en doa en em ziskouezet dezhañ dre un huñvre o lavarout : In hoc signo vinces, "dre ar aouez-mañ e trec'hi." Hag-eñ o ren hiviziken war ar C'hornôg koulz hag ar Reter e reas eus Bizantion eleze Kêrgustentin, hiziv Istamboul, e gêrbenn. Dre Dezvenegezh Milano e 313 e aotreas ar gwir "da azeuliñ hervez e zoare an douelezh a zo en neñvoù" o reiñ evel-se ar frankiz d'ar gristenion da bleustriñ o feiz. Gervel a reas Senez Nikaia hag e savas pennilizoù e Roma. Badezet da zeiz e dremenvar da Sul ar Pantekost e vez sellet outañ gant ilizoù ar Reter evel impalaer kristen kentañ, "Abostol an Aotroù e-touez ar rouaned", hag isapostolos, "par d'an Ebestel".
- En VIIIvet kantved, sant Venant ha santez Isberg pe Jizela (Gg Ysbergue pe Gisèle), penitiourion e Bro-Artez. Jizela, merc'h Pepinus Brevus ha c'hoar d'an hini a zeuas da vezañ Karl-Veur a zibabas da rener speredel ar penitiour Venant, hag-eñ mab dug Loren ha priñs karolingat. Dre ma voe lakaet war gont Venant e nac'he-hi dimeziñ hag he doa tapet ur c'hleñved ouzh he dizremmañ e voe lazhet e 766 ha taolet e gorf er stêr. Isberg a bareas avat goude bezañ debret ur silienn pesketaet lec'h ma oa bet taolet korf ar penitiour. Savet e voe un iliz war urzh ar roue hag e renas Isberg eno ar vuhez penitiourez e-pad tregont vloaz diwezhañ he buhez.
- E 1001, distro da Zoue ene sant Tepod Viena, eskob ha feizvonnour. Niz-bihan roue Burgondia hag eontr-kuñv sant Tepod Provins e voe ganet Tepod pe Ubald e Tolvon ha desavet e lez ar roue Konrad. Anvet eskob Vienne (Vienna en arpitane), e voe heverk e garitez hag e zeoliezh e-kerzh pevar bloaz ha daou ugent e eskobelezh eno.
- E 1861, sant Charlez-Eujen de Mazonod, eskob Marsilha, diazezour Obladed Mari-Dinamm, a skouerias e eskobiezh dre e vriwerzhioù, e oberoù mat hag e skridoù.
- Merzherion ar Meksik: sant Kristof Magallanes, beleg, sant Eosten Calocca, beleg, hag o c'humpagnuned lakaet d'ar marv etre 1926 ha 1928. O-daou e oant en hevelep parrez pa voent fuzuilhet dre gasoni evit ar feiz kristen.

- E Breizh: Treuzlec'h relegoù sant Padern, eskob Gwened ha gouel Paeron an eskobiezh.- En Iwerzhon, er VI vet kantved, sant Barrfhionn pe Fionnbharr (Barrwenn pe Gwennvarr), abad.
- E 1742 e Kistreberzh, tremenvan ar pac'hiad Tad Mulet, warlerc'hier sant Loeiz-Vari a Voñforzh.

D'an 22 a viz Mae

- War-dro ar bloaz a c'hras 250, en Afrika an hanternozn merzherenti ar sent Emil ha Kast, a voe lazhet dre an tan. Goude bezañ kilet rak krizder ar jahinerezh e kavjont nerzh en-dro betek embann o feiz dirak o barnerion o barnas da vezañ dêvet ez vev. Neuze en em ziskouejont, gouez da sant Kiprian, kreñvoc'h eget ar flammoù.
- Er Vvet kantved, e Korsika, merzherenti santez Julia, gwerc'hez. Genidik eus Kartaga, e voe gwerzhnet evel sklavourez ha kaset war ur vag a reas peñse war aodoù Korsika lec'h ma voe jahinet ha kroazstaget en abeg d'he feiz.
- E 1457, e Cascia en Italia, ganedigezh en neñvoù santez Rita, mamm a diegezh ha da c'houde leanez e urzh Sant-Eosten, lesanvet santez ar mennadoù anvezus. Kouerez e oa, dimezet ouzh un den diroll ha feuls hag a voe muntret. Dont a reas hi a-benn da virout ouzh he daou vab da zialañ o zad. Aet e kouent Cascia e roas skouerioù dreist a habaskted hag a vriwerc'h.
- E Breizh-Veur, er Vvet kantved, santez Elena a Gaernafon, anvet c'hoazh Elena al Luoz (Kb. Elen Lluyddog), rouanez, c'hoar Konan Meriadeg. Ganet e 340 eus ar roue Eudaf Hen, e timezas gant Maksen Wledig. Goude marv he fried e vije aet da leanez. Mervel a reas e peoc'h an Aotroù e 420.
- E Breizh, er Vvet pe VIvet kantved, sant Aotrom, abad en Iwerzhon, penitiour e Tredarzeg e Bro-Dreger.
- Er VIIvet kantved, ar sent Boelian (Gg Boetien, Boethian) hag Albev (Gg Albeu), penitiourion iwerzhonat er c'hevandir. Hag int Iwerzhoniz, diskibled sant Fursa, gant sant Aelgeis (Gg Algis) ha sant Govan (Gg Gobain) a vefe o breudeur, e savjont ur manati e-kichen Laon e Bro-C'Hall hag e voent lazhet gant hailhoned. Breudeur e vefent ivez d'ar sent Gwaznou, Elog ha Mombl.

D'an 23 a viz Mae

- E 259, e Kartaga, da vare heskinadegoù an impalaer Valerian, merzherenti ar sent Lucius, Montan, Juluan ha Victorig, dibennet en abeg d'o fealded d'ar feiz kristen a oa bet kelennet dezho gant sant Kiprian. War un dro ganto e vez graet koun eus sant Viktor, beleg, merzheriet araozo ha eus sant Donasian marvet en toullbac'h.
- E 607, merzherenti sant Dider (Gl. Didier), eskob Viena e Bro-C'hall. Dre ma rebechas ouzh ar rouanez Brunehilde un eured gwadserc'h ha digevionderioù all e voe da-gentañ harluet ganti, ha da-c'houde harzet en e iliz-veur, labezhet gant ar soudarded ha peurlazhet a daolioù bazh o resev evel-se kurunenn ar verzherion.
- E 1764, e Roma, distro da Zoue ene sant Yann-Vadezour de Rossi, beleg. Genidik eus Genova, e pleustras e vinistrerezh e Roma e-touez ar beorion, ar glañvourion hag an doullbac'hidi o ouestlañ dezho e holl vadoù hag e holl amzer.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Sul pe Sulian, abad, eskob, diskibl sant Kadvan, keneil sant Mael, genidik eus Breizh-Vihan, penitiour e Tredarzeg e Bro-Dreger.
- En Iwerzhon, sant Govnann (Iw. Goibhneann), manac'h.

D'ar 24 a viz Mae

- Er Iañ kantved, sant Manahen, "mignon a-vihanik d'an tetrark Herodez" (Ob 13,1), e voe profed ha doazhour en Iliz Antiokeia, war un dro gant Barnaba, Simon lesanvet Niger ha Loukioz ar C'hirenead.
- War-dro 450, sant Visant Leriñs, beleg, manac'h, doueonour ha skrivagner. Lakaat a reas war wel keal diorreidigezh ar feiz.

- E 592, sant Simeon ar Peulour, ar Yaouaer, beleg ha penitiour. Bevañ a reas kludet war ur peulvan e kendiviz gant ar C'hrist hag an aeled, hag eñ lakaet barrek da skarzhañ an diaouled.
- Gouel Santez Mari Skoazellerez ar Gristenion, kehelet e Sheshan e Shangai. Devezh pediñ evit Iliz Bro-Sina bet diazezet gant ar Pab Benead XVI e 2011.
- War-dro 304, ar sent Donasian ha Rogasian, lesanvet "Bugale Naoned", merzherion da geñver heskinadegoù Maximanus e Naoned. Bez' e oant eus metoù an uhelidi Gallian-roman ha na oant ket bet kristenaet c'hoazh. Donasian avat a voe gounezet d'ar feiz ha badezet gant sant Similian eskob Naoned. E vreur Rogasian a oa katekizad c'hoazh pa voent tamallet o daou en abeg d'o feiz da brefed Gallia, deuet betek Naoned. Harzet e voent ha dre ma embannjont dichek e oant kristenion e voent chadennet ha taolet er c'harc'har. Kondaonet d'ar marv, e voent lakaet war ar marc'h-koad, toullet o c'horzailhenn a daolioù goaf ha dibennet.
- En Iwerzhon, santez Dervilez (Iw. Dearbhile), maouez santel.